

# AL LIAMM



Nevez Amzer 1946

N° 1

# AL LIAMM

Nevez Amzer 1946

N° 1

## TAOLENN

	Pagenn
DAREMPREDOU gant Latimier .. .. .	2
STROLLAD <i>Al Liamm</i> .. .. .	3
CYSYLLTIADAU (Cymraeg gan Olier) .. .. .	4
CUMANN <i>Al Liamm</i> (An Lub) .. .. .	6
KEMBRE gant A.E. Kenon .. .. .	7
AR C'HEMBRAEG HAG AR SAOZNEG gant F. E. .. .. .	9
EUR SELL WAR LENNEGEZ KEMBRE gant F. E. .. .. .	12
IWERZON 1921-1929 : AR POLITIKEREZ HAG AN EMGANN EVIT AR YEZ gant P. ar Bihan .. .. .	17
AN ARZ IWERZONEK gant Ronan C'houerou .. .. .	19
AN HARLUAD gant Tregad Keruzore .. .. .	21
ER GLOED EUR gant A. J. R. .. .. .	23
NEWYDDION O LYDAW .. .. .	24

## DAREMPREDOU

Rak me halon zo duzé, én énézegi peur  
E gleñer mesk on herrek yeh santel er Gelted.  
KALLOC'H.

Abaoe ar c'hantved diweza, niverus a-walc'h eo bet an darempredou etre strolladou keltiek 'zo da ziskouez anat e oa Keltia eun tiegez bras, ar gengarantez o ren e-barz... Ha koulskoude, ret eo ansav e chomomp an holl diouiziekenañ e-kenver ar pezh a sell ouz hor breudeur a ouenn hag a yez. Ezomm bras e oa eta eus eur strollad etrekeltiek evit stardaat ha resisaat al liammoù lakaet etrezomp gant an Natur. En abeg da se, eun toulladig Bretoned yaouank o chom e Pariz o deus krouet eur gevredigez a zeuio — ma fell d'an holl vrogarourien he skoazella — da veza eun dra a-bouez e sell ar C'heltva a-bez.

An dra genta da ober a oa kroui eur gelc'hgelaouenn evit dastum ar studioù savet diwar-benn ar c'hudennoù keltiek. Eveljust, o veza ma 'z eo krouet gant Bretoned ar gevredigez nevez, ar brezoneg a vo yez ar gelaouenn, daoust ma vo embannet an alies a gwella pennadoù kembraek ha gouezelek.

Diaes-kenañ eo ober eur wir gelc'hgelaouenn etrekeltiek en eur implijout eur yez keltiek, ...pe veur a hini. Evitomp, hor soñj a zo dreist-holl rei deskadurez ha kelou d'ar Vretoned diwar-benn ar Gelted all, hag ivez esaea skigna er broioù keltiek all anaoudegez Vreiz, ha karantez outi. Eur striv bras eo ret ober eta evit dont a-benn eus an taol. Ezomm hon eus eus skoazell an holl Vreiziz desket, dreist-holl eus ar re o deus bet dija darempredou gant hor breudeur tramor. Ac'hanta neuze d'ar re goz ha d'ar re yaouank dont davedomp gant menozioù, pennadoù, prezegennou... hag eur skodennig. Evel-just, pep strollad breizek, ne vern ar menozioù a zifenn a c'hell, hag a dle kas kelou d'eomp, ha rei skoazell. C'hoant hon eus, ivez, ouspenn ar gelaouenn, da embann levrioù da zeski ar yezou keltiek all (da skouer geriadurioù, yezadurioù, hag all), ha ma'z eus eun tu da skigna eun tammig hor Brezoneg-ni e-touez lenneien Geltia, e vo graet gant plijadur.

Ouzenn, genta ma vo posubl, e vo ret en em glevout

evit mont da weladenni broioù hor breudeur, ha kroui liammoù nevez etrezo ha ni. Eul lec'h dibar, d'eomp-ni hon unan, hon eus, ni ar Vretoned, o veza ma 'z omp ar gelted diweza o chom war an douar bras. Ha ret eo d'eomp proui d'ar re all e chomomp daoust da se kelted penn-kil-hatroad, lorc'h ennomp eus hor bro hag eus hor yez.

Neuze, gortoz a reomp izili pep strollad breizek, a fell d'ezo hep ober trouz brasaat o deskadurez keltiek hag he lakaat da veza eun dra veo ha gwirion.

Bec'h d'ez i eta evit Keltia, ha kleze Arzur a lintro eur wech c'hoaz er marevez da zont.

Andreo-L. LATIMIER

## Strollad AL LIAMM

Ar strollad nevez diazezet ma komz anezan hor mignon a zo bet diskleriet hervez al lezenn dindan ano *Al Liamm*.

Setu aman e bal :

Starda an darempredou etre ar broioù keltiek

1° oc'h aozha beajoù, gouelioù etrekeltiek

2° o kroui e pep bro geltiek eur greizenn pe veur a hini karget da rei diskleriadurioù da garourien ar geltiegezh diwarbenn ar werinoniezh, an doare beva, ar gouelioù keltiek hag all.

3° o sevel eur gelc'hgelaouenn skrivet e yezou keltiek-brezoneg, kembraeg hag all evit izili ar gevredigez.

Ar skodenn bloaz 200 lur d'an nebeuta a zo da gas da denzorer ar strollad.

Per Le Bihan

6, rue du Maréchal-Joffre

Versailles (Seine-et-Oise)

C. C. 5349-06 — Paris

Kelc'hgelaouenn ar strollad ne vo ket lakaet e gwerz ; miret striz eo evit an izili.

Setu :

— m'oc'h a du ganimp

— m'oc'h eus c'hoant sikour adsevel ar gouelioù etrekeltiek

— ma plij d'eoc'h gwelout hor c'hannadig o kreski hag oc'h ober berz.

N'oc'h eus nemet kas dioustu ho prof da denzorer strollad *Al Liamm*.

## CYSYLLTIADAU

Canys fy nghalon sydd tuhwnt yn yr ynysodd llodion  
Lle clywir ar eu creigiau iaith santaidd y Celtiaid.

KALLOCH.

Bu yn ddigon aml y cysylltiadau rhwng y gwledydd  
Celtaidd ers y ganrif ddiwethaf i ddangos bod Celtia yn  
fwy nag enw : teulu mawr a phawb ynddo yn caru ei  
gilydd. Eto rhaid cyfaddef nad ydym yn gwybod ond ychydig  
iawn am y cenhedloedd sydd chwiorydd i'n eiddo  
drwy yr hil ac yr iaith. Y mae eisieu arnom oherwydd  
hynny cael cymdeithas rhyng-geltaidd er mwyn dal yn  
agosach pobloedd sydd yn perthyn i'r un hil drwy Natur.  
Y mae heddyw nifer fechan o Lydawiaid ieuaine yn pres-  
wyllo ym Mharis wedi sefydlu cymdeithas a fydd — os  
myn yr oll wladgarwyr ei chefnogi — beth o bwys yn y  
dyfodol am yr oll genedloedd Celtaidd. Y peth cyntaf i'w  
wneuthur ydyw creu cylchgrawn a chasglu ynddi efry-  
diaethau am broblemau yn perthyn i Geltia. Wrth gwrs,  
gan fod y gymdeithas newydd honno wedi ei sefydlu gan  
Llydawyr, llydaweg fydd iaith y gymdeithas, er i ni  
gyhoeddu erthyglau yn Gymraeg ac hyd yn oed mewn  
gwyddeleg efallai pan allwn.

Peth anhawdd iawn ydyw cael cylchgrawn rhyng-gel-  
taidd wirioneddol a hithau heb ddefnyddio un iaith gel-  
taidd neu y gwahanol ieithoedd celtaidd.

Ein bwriad ni ydyw gwneud i'r Llydawyr adnabod y  
Celtiaid eraill, a cheisio lledu cariad tuagat Llydaw  
ymhlith ein brodyr.

Rhaid wrth ymdrech fawr i gyrraedd yr amcanion  
hynny. Eisieu sydd arnom cael ein cefnogi gan yr oll Gel-  
taid dysgedig, yn bennaf gan y rhai sydd wedi dyfod  
eisies i gysylltiad â Llydaw.

Deued y rhai hen ac y rhai ieuaine tuag atom ac anfonent  
i ni erthyglau, ysgrifau... a thipyn o arian. Wrth gwrs fe  
all — a fe ddylai — pob cymdeithas beth bynag ydyw ei  
delfryd rhoi newyddion i ni ac ein cefnogi.

Dymunwn hefyd — tu hwnt i'r cylchgrawn — cyhoeddi  
llyfrau dysgu yr ieithoedd celtaidd (er enghraifft, geiria-  
duron gramadegau a.a.) ac, os gallwn, ceisio lledu ein  
llydaweg ni ymhlith efrydyddion Celtia.

Heblaw hynny, cyn gynted ag y gallwn, fe fydd yn  
rhaid ymweled â'r gwledydd celtaidd eraill i sefydlu  
cysylltiadau newydd rhwng ein brodyr a ni. Lle digyffelyb,  
sydd i ni Llydawyr am mai ni ydyw y Celtiaid diwethaf  
yn preswyllo ar y cyfandir. Y mae yn rhaid i ni ddangos  
ein bod eto, er hynny, yn Geltiaid yn llwyr ac yn falch o  
hynny.

Yr ydym yn disgwyl cael aelodau oddiwrth pob cym-  
deithas : deued i ymaelodi pawb sydd gwydd arno gwybod  
mwy am ei frodyr.

Cleddyf Arthur a lewyrcha eto yn y dyfodol.

Andreo LATIMIER  
Cymraeg gan Olier

## Cymdeithas AL LIAMM

Y gymdeithas honno sydd newydd wedi ei sefydlu a  
wedi ei chofrestru o dan yr enw *Al Liamm* — (« y rhwym »  
yn Gymraeg).

Dyma ei hamcanion :

Dal y Celtiaid yn agosach i'w gilydd

1° gan beiriau ymdeithiau a gwyliau cydgeltaidd

2° gan sefydlu ym mhob gwlad geltaidd canolfannau i  
hysbysu y Celtgarwyr am lenyddiaethau, diwydiannau a  
gwareiddiadau y gwledydd celtaidd.

3° gan sefydlu cylchgrawn yn cael ei ysgrifennu yn yr  
ieithoedd celtaidd, llydaweg, cymraeg a.a. er mwyn aelo-  
dau y gymdeithas.

Tanysgrifiad 200 franc bob blwyddyn. Anfonwch at  
drysorwr y gymdeithas.

Le Bihan, Pierre  
6, rue du Maréchal-Joffre  
Versailles

Seine-et-Oise France

C. C. 5349-06 — Paris

Ni ellir prynu y cylchgrawn : Cedwir ef i aelodau y  
gymdeithas

Dyma

— os cytunwch â ni

— os dymunwch ein cefnogi i adsefydlu y gwyliau  
rhyng-gylltaidd

— os mynnwch weled ein cylchgrawn yn llwyddo :  
Anfonwch arian yn ddiodeod i drysorwr *Al Liamm*.

## Cumann AL LIAMM

(An Lùb)

Fograoidh an cumann nua so do réir na dli fén ainm *Al Liamm*.

Anno a chuspoir :

Muinntearas na bpobal gceilteach do dhaingniu

1° Tré thurusanna agus aeriochtaí idircheilteacha do chur sa tsiul.

2° Tré ionad a bhunu ins gach tir cheilteach chun cairde an cheilteachais do chur ar a neolas fé ealadhain, fé litriocht, fé bhéaloideas agus fé shaol na dtiortha ceilteacha.

3° Tré iris d' fhoillsiu ins na teangacha ceilteacha a thurfaidh le chéile aisti na mbéadh suim ag na tíortha deifriula ceilteacha.

Ni diolfar an iris ; ta sí in-airithe do bhaill an chumainn

Da cheud frainnc in-aghaidh na bliana an sintius.

Cabhraigh liun : sgríobh duinn, cuir, chuinn sgéala, altanna do ghach saghas... agus do shintius !

Ar son na Ceiltise !

Le Bihan Pierre  
6, rue du Maréchal-Joffre  
Versailles  
Seine-et-Oise France  
C. C. 5349-06 — Paris



## KEMBRE

Kembre. Nag a zremmweliou a vez digoret d'hor spered gant an ano-se. E-pad ar bloaveziou brezel e oamp didrouc'het eus Breiz-Veur, eus ar Vammvro. Dizarempred gant hor breudeur tramor. O ankouaat na raemp ket, nawaz. Ar c'hoant hag ar garantez a vœ kresket hepken a-se. Ar re yaouank dreist-holl, nevez-c'hanet d'o bro, d'o yez alies, a gleve hiraez an anoieu kar hag heson : Abertawe, Caerfyrddin, Bangor...

Ha fantazia. Kembre... Mor ha menezioù. Eur Vreiz tost-oc'h d'an neñv erc'h he c'herniou, nes d'an ifern ivez he zraoniennou saotret gant lorgnez du ar mengleuzioù. Aze e klever ivez hor yez. O, ya, diforc'h mat eo eus hor brezonég, ha diaes d'he c'hompren. Kaletoc'h eget yez Arvor. ha dezi soniou iskis, ha koulskoude ken fraez atao, ha ken boemus pa gomz a garantez :

... *Pan welais gyntaf yr hoywaf riain  
Roedd goch fy neurydd a gwych fy nwygrain,  
Lyllwn dros y llwyni drain parh â'r coed  
A mynd i'r oed a'm henaid ar adain...*

Eur vro ma n'o deus ket ankouaet an dud o lore'h, ma klever kenkoulz ha mil bloaz zo-korieu o kana gwerzen-nou awen striz hag uhel ar varzed. Bro santel, pet ene yaouank o deus huñvreet mont davedout evel pirc'hined leun a oanag ?

Koulskoude, daoust d'ar fantazi ha d'ar goanag, eun diskred a zeue alies evel eur pistig d'hor c'halon : gouzout a reomp e c'hellomp kavout aze an hengouniou hag al lennegez a ra diouer deomp amañ. Gouzout a reomp e vez moulet e Kembre leoriou ha kelaouennou a gantadou. Met droug-ziouganerien a lavar a-wechou nen deo ket sklæroc'h dazoned ar c'hembraeg eget hini ar brezonég, mouget ma vez muioc'h mui gant mor ar Saozneg. Ha petra a zeufe diwar ar brezel-mañ gant ar bagadou a Saozon a dec'he betek hor menezioù, rak an nijerien didruez ? Teodou fall a zaskane penaos e oa aet Kembreiz da Saos, na oa ere ebet ken etrezomp hag i, nemet ar yez. Pep tra ha daouzek kant bloaz hon dispartie. Hag e veze skeudennet deomp chapelioù gwenn ha yen d'ar galon, enno mouez c'haro eur beleg

o tregerni, o c'hervel malloz Yehovah war ar bed-mañ a bec'hed.

Hag adkavet deomp hor breudeur. Ar re a gred ez eo gaou danevell emgann Sant Kast n'o deus ket em gavet gant Kembreiz. N'o deus ket klevet ton estlammet an hini am c'hrede Gall pa lavaren dezañ : — « A 'r wyt ti yn Gymro ! »

— « Craist ! » emezañ, « Siarad Cymraeg ! »

Ha me abenn : « 'R wyn o Lydaw... »

Deut e oa ar sklerijenn dezañ e Ledao, kenkoulz hag e Preden, ez eus eur bern Kembreiz, tud a vez, evel doun « ganet ha maget kembreat ». Ha gant levez e veze komzet eus « yr hen Wlad », ar Vro goz, eus an darempredou, eus ar Breizad a zeue bep bloaz d'ar gêr da werza onion : — « Yr oedd yn ddôd bob blwyddyn i werthu wynion, ac y mae ef yn siarad Cymraeg fel fy nain ! ». « Komz a ra Kembraeg evel va mamm-goz ! »

Bevet am eus ganto. Naren, nen dint ket estrenien deomp, ganto dremmou anavet kendirvi ha keneiled a welomp bemdeiz er vro. Hevelep eneou yac'h hag eeun, hevelep spered taer ha sart war eun dro. Kanet am eus ganto, e-pad ar beilhadegou hir hor soniou dispar ma kan enno ar Ouenn na fell ket dezi mervel.

Hag an holl dud-se, deut eus ar park, eus ar mengleuz pe eus kêr, a oa deut endro dezo, a oueled o anian, skiant an armou ; hag e teuent davedomp en o c'hirri-houarnet, evel hon tadou gwechall, a-dreuz Europa war o c'hirri-emgann... Kadourion. Nep en deus o gwelet, goude an emgann, o saludi gant lorc'h banniel glas-gwer ha gwenn an dreg ruz, uhel er vann, a oar perak e c'hellomp dere'hel lorc'h hor gwad. Mar kar d'hon Doueou, devezioù bras a vo c'hoaz evidomp.

Gouezet am eus en doa dalc'het start ar C'hembraeg enep ar repuidi saos. Trec'h d'ar saozneg, zoken, peogwir an deskidi saos kenkoulz hag ar vugale o deus desket ar yez keltiek. Neventi vat...

Ha koulskoude n'am eus kavet nemet nebeut a ouie e oa bet a-skourr ouz an Tour, e Lunden, penn trouc'het eur roue, e ano Llewelyn. Ar roue diweza o komz eur yez geltiek...

Mar gouvezfent...

A. E. KENON.

## Ar c'hembraeg hag ar saozneg

Diou yez o veva kichen-ha-kichen o deus dalc'hmat levezon an eil war an all, nemet ez eo an hini galloudusa, an hini he deus eviti nerz ar reperez-stad, a bouez ar pounnera war he amezegez, betek kinnig he c'has da get dre hir amzer ;

Ar pez a zo c'hoarvezet e Breiz gant ar brezoneg e keñver ar galleg a zo ivez gwir dre vras evit ar c'hembraeg e keñver ar saozneg.

An arouez boutina eus levezon eur yez all eo ar geriou amprestet diganti. Abred e kaver kement-se en istor ar c'hembraeg. Kemeret en deus geriou digant ar saozneg adal amzer an hen-saozneg, da lavarout eo kent an daouzekvet kantved.

Eus an hen-saozneg eo o deus amprestet kembreiz an ano roet ganto d'o danvez-roue *edlin*, koulz ha d'ar « seiz » ma raent anezañ *sidan*. Eun niver geriou o sellout ouz buhez an ti hag an douar a zo eus an hevelep orin, da skouer *burdd* evit envel an « daol », gweithiwr-hur evit « gopr-devezour », *llidiart* evit « draf » hag all. Betek ar ger *tarian* a zo deut da gemer lec'h ar geriou keltiek « skoed » pe « aes ». Ar ger *cusan* = « pok » a zo ken saoz e orin hag hini *punt* ano al *lur-moneiz*.

Rak darempredou dibaouez, estreget d'en em laz, a zo bet a-hed-ar wech etre Saozon ha Kembreiz. Er seizvet kantved e sav eun emgleo etre Kadwallon a Vro-Gembre ha Penda, roue saoz Mersia. Gwreg Oswy, roue Northumbria, war-dro c'houec'h kant daou ha daou-ugent, a oa douarenez da Run mab Urien ap Kenvarc'h, ma kanas Taliesin e c'hloar. En navet hag en deket kantved ivez, ez oa karadek an darempredou etre roueed Kembre ha lez saoz Wessex, en amzer ar roue *Alfred* hag ar C'hembread *Hywel dda*. Hevelep tra a c'hoarveze evit ar manatiou, evel ma weler diouz an eskemm levriou ha dournskridou a voe etrezo e-doug ar Grenn-Amzer.

An ampresta geriou a gendalc'has goude aloubidigez Bro-Saoz gant an Normaned. Daoust d'ar Saozon da veza bremañ eur hobl drec'het, o yez a zo hini an dud vunut a labour an douar hag a gas en-dro ar c'henwerz. Dimezioù niverus a vo etre tiegezioù uhelidi Kembre ha re an uhelidi Norman, hogen digant ar saozneg eo ha nann

digant galleg an uhelidi-se ez eo deut er c'hembraeg zoken ar geriou a sav o orin d'ar galleg.

Eveljust ne deo ket hepken e-pad ar Grenn-Amzer ma' z eus bet eus an darempredou-se, o tegas geriou eus ar saozneg er c'hembraeg. Deut int da veza stankoc'h-stank hag an amprestou kennebeut n'int ket aet war rouesaat.

Hogen, arabat d'eomp disoñjal ne deo ket an amprestou geriadur ar re noazusa d'eur yez. Gant ar saozneg endeeun hon eus skouer eur yez miret ganti he fersonelez daoust d'ar geriou gallek a zo deut enni a-vil-vern eun amzer 'zo bet. Al levezon war an doare da stumma ar frazenn a zo kalz grevusoc'h ha risklusoc'h ivez eo ampresta troiou espar eur yez d'o degas en eur yez all. Marteze ez eo d'impni, brezonegerien e teu war-wel gwelloc'h ar saoznekadurioù degemeret gant Kembreiz a-hed o istor evel m'eo ar Vretoned Tramor a dle santout gwelloc'h 'egedomp-ni ar pez a zo gantañ c'houez ar galleg en hor brezoneg.

Arvarus-dreist ha kemmus-kenañ ez eo an emzalc'h etre diou yez ne dint ket hepken amezeien, hogen luziet ouz-penn o zomani kouls er speredou ha war an dachenn. E-pad pell amzer ez eo bet kalz gwelloc'h ar bed evit ar c'hembraeg eget ne deo bet evit ar brezoneg. Eul lennegezh koz talvoudus o deus bet Kembreiz. Kendalc'het en deus ar c'hembraeg da veza yez an uhelidi kouls hag hini ar werin.

Koulskoude eur mare a zo bet ivez risklus-tre evit ar c'hembraeg, an hini ma voe staget Bro-Gembre ouz Bro-Saoz e derou ar c'houezekvet kantved. Er bloaz pemzek kant pemp ha tregont e voe embannet eur reolenn a lavare evelhen : « neb a ra gant ar c'hembraeg n'en devo hiviziken karg na gopr ebet er rouantelez-mañ a Vro-Saoz, Kembre pe ar rann-vroioù all eus domaniou ar roue, ha rancout a raio dilezel pep karg ha pep gopr nemet ober a rafe gant ar saozneg ».

Kiriek e voe al lezenn-se, douget gant eur roue a diegez an d-Tudored, da lavarout eo Kembre dre e ouenn, da galz a uhelidi a Vro-Gembre da zeski ar saozneg evit mirout o c'hargou dindan ar gouarnamant pe c'hounit reou all. Geriadur 1547 a voe savet kentoc'h da zeski saozneg d'ar gembraegerien evel ma voe embannet e Breiz ar geriadur anvet *katolikon* evit deski d'ar vrezonegerien galleg ha latin. Pa voe kemennet, e 1563, trei ar Vibl hag al Levir-Pedennou e kembraeg, ne voe ket kennebeut e soñj ober vat d'ar yez-se, evit ma teske an holl buanoc'h ar saozneg diwar geñveria an diou yez, ne lavaran ket.

Gras d'an droidigez-se, savet er yez lennegezh ar vrava ez eo bet saveteet ar c'hembraeg. A drugarez d'ar Vibl,

lennet e Bro-Gembre, aketusoc'h moarvat eget e bro all ebet war an douar, ne deo ket deut Kembreiz da veza, evel ar Vretoned, siouaz ! eur bobl ne oar ket lenn yez he c'havell.

Harpet evelse gant ar relijion ez eo deut ar c'hembraeg a-benn da veza, daoust da levezon pounneroc'h-pounner ar saozneg, anezi yez ar renerez hag ar geleennadurez a-berz stad. Da zerou an naontekvet kantved en doa ar c'hembraeg gounezet an trec'h war dachenn an iliz, hag e derou an ugentved e teu gantañ an trec'h war dachenn ar skol.

E reoladur ar Geleennadurez evit 1907 e lenner ar c'homzou-mañ : « Renerien ar Geleennadurez a garfe gwelout pep kelenner a Gembre o veiza talvoudegezh kelennadurezhel ar c'hembraeg, hag a zo graet mat, dre e zanevellou hag e varzonezh pinvidik, evit ar yaouankiz ».

Kredi a reomp huñvreal, pa lennomp komzou ken poellek ha ken hegarat e-keñver eur yez keltiek. Ouspenn komzou a zo bet. Roet eo bet e lec'h d'ar c'hembraeg koulz er skolioù bihan, er skolioù-etre hag er skolioù-meur.

Lenn a c'hellomp da skouer, er gelaouenn « Le Français Moderne » Meurz-Ebrel mil nao c'hant pevar ha tregont, ez eus bet, e 1933, tri mil daou c'hant ha seiz skoliad o tremen an arnodenn war ar c'hembraeg e skolioù-etre Bro-Gembre ha Bro-Saoz, e keñver mil daou c'hant ha pevar ugent e 1920. War well ez a eta an traou war dachenn ar skol.

Ne deo ket evit se gounezet evit mat an trec'h gant ar c'hembraeg. Evit ar yezou evel evit an dud, beva a zo stourm dibaouez. Pep darvoud nevez en istor an den a zo a-bouez evit planedenn ar yezou. Gounezet gantañ e lec'h er skol, en deus ranket diouzu ar c'hembraeg ren an emgann er skingomzerezh hag er c'helaouennou. Daoust d'ezañ da c'hounit tachenn amañ hag ahont, arvarus e kendalc'h da veza an dazont. Al labouradegoù bras o deus degaset saoznegerien a vil-vern da Vro-Gembre, e doare ma ne deo mui ar gembraegerien nemet seiz ha tregont dre gant eus ar boblañs, e-keñver-pevar ugent dre gant a oa anezo e derou an naontekvet kantved.

Anzav a rankomp avat eun dra : mar en deus ar saozneg moustret war ar c'hembraeg dre ar pouez roet d'ezañ gant an istor, ne deo ket bet ar Saozon bpred kriz ha diblegus e-keñver yez Kembreiz. Roet o deus en Amzer-Vremañ dreist-holl, da Gembreiz an tu da stourm war bep tachenn evit mirout d'ar c'hembraeg buhez yac'h ha sked, hag e c'hellont kaout spi en dazont gant ma kendalc'hint da veza Kembreiz kalonek, evel m'int bet betek hen.

F.E.

## Eur sell war Lennegez Kembre

Eur brezoneger, kavet an tu hag an amzer gantañ da studia madik a-walc'h lennegez e vro, a sav d'ezañ c'hoant peurvuia da staga ivez gant lennegez Bro-Gembre. Ne deo ket eur c'hammed diaes d'ober, gant m'en devezo amzer ha levriou.

Buan e teu ar brezoneger-se da welout ez eo trec'h Kembreiz warnomp e daou zoare a-bouez : miret o deus skridou talvoudus e Kembraeg krenn, ken e barzoniez ken e komz-plaen, setu evit an doare kenta. Da eil, daoust d'ar c'hembraeg da veza rannet e rannyezou, eur yez lennegel a zo, diazezet war droidigez ar Vibl 1588-1620, hag e kendalc'h ar skrivagnerien d'ober gant ar benveg-se betek hizio an deiz.

### I LENNEGEZ AR GRENN-AMZER.

a) BARZONIEZ. — Ar rummad kosa a yez graet anezañ kentvarzed. Ha sevel a ra oberou Aneirin, Taliesin, Meurzin ha Levarc'h Hen d'ar VI-vet kantved, evel ma lavar lod, aner eo d'imp pledi gant ar gudenn-se. Lod kaer eus ar barzonegou lakaet dindan o ano ne dint ket bet savet ganto, hiniennou avat ha darnou eus peziou all a zo warno liou eun amzer goz-tre. Hogen n'eus nikun eus an dournskridou m'int bet miret enno o sevel d'eur mare uheloc'h eget an XII-vet kantved. Daou abeg a zo d'ar gudenn da veza luziet. Diouz eun tu c'hoarvezout a ra gant ar skrivenien eilskriva, hep kemma tra enno, gerioù skrid eun amzer gosoc'h. Diouz eun tu all e c'hoarvez ivez gant barzonegou ar gentvarzed beza deut betek ennomp en eur stumm yaouankaet.

Gougentvarzed a reer eus ar re a vleunias adal an XI vet kantved, Meilyr an hini kosa anezo. Trec'het ha lazet e voe e vestr Trahaearn e 1080 gant armeou Grifiz Ab Kenan ha Rhys Ab Tewdwr. Ar priñs kenta, deut da veza roue Norz Kembre, a oa bet ganet en Iwerzon. Degas a eure gantañ levezon sonerez ha lennegez ar vro m'oa aet e diegez da glask repu enni. An eil, roue an Dehou, da lavarout eo Kreisteiz Kembre, a oa bet eur pennad mat en harlu e Breiz-Vihan. War a greder, gantañ a vije distroet d'e vro darn mat eus an hengounioù a zo diazez meur a unan eus an danevellou kaer miret d'imp e *Levr Ruz Hergest*, eun dournskrid eus ar XIV-vet kantved.

Gwalc'hmai, mab Meilyn, a zo gwelloc'h barz eget e dad. *Owen Keveiliog*, mab Grifiz, priñs Powys a zo oberour ar barzoneg brudet *Korn Hirias*. Howel, mab Owen Gwenez, roue Norz Kembre, a zo aesoc'h e oberou da lenn eget re ar varzed meneget betek hen. Menegi a ranker da gloza ar rummad-mañ ano Einion, barz evel Gwalc'hmai e dad ha Meilyr, e dad koz.

En amzer Lewelyn Ab Iorwerzh e kavomp Kenzelw, enebour touet d'ar venec'h evel ma c'hoarveze alies d'ar varzed beza. Levarc'h Ab Lewelyn a oa barz roue Gwenez. Daviz Benfras a oa stag ouz eun hevelep mestr. Elidir, lesanvet *Sais* (Saoz), marteze en abeg d'e zarempredou ouz ar Saozon, re stank da veno Lewelyn Ab Iorwerth, a zo eur barz, relijiel peurvuia danvez e varzonegou.

b) KOMZ-PLAEN. — Jafrez a Venoe, anavezet el lennegez kembraek dindan an ano Grifiz Ab Arzur, en deus savet *Historia Britonum* (Istor ar Vrezoned). Hervezañ ne vefe e levr nemet eun droidigez eus eur skrid degaset a Vreiz Vihan. Petra bennak a zo da gredi pe get diwar-benn kement-se, e oberenn a zo bet an eienenn m'eo deut eun niver bras eus harzed ha romantourien an Amzer-Grenn da'eva eus he dour.

Ar skridou kembraek, kar tost pe dostoc'h da levr latin Jafrez a Venoe, a vez graet anezo ar *Brudou*. Diforc'h a reer *Brud Grifiz ab Arzur*, troet diwar al latin, *Brud Tesilio*, anezañ an hevelep skrid, nemet ez eo berroc'h hag eeunoc'h, *Brud ar Saozon*, o kemmeska darvoudou Kembre gant notennoù diwar-benn istor ar Saozon ha *Brud ar Briñsed*, anezañ eur c'hendalc'h da *Vrud Grifiz*.

Menegi a ranker amañ *Lezennoù Howel Vat*, a oa roue an Dehou en Xvet kantved hag an *Triadou*, anezo meur a zastumadenn o sevel, ar re gosa d'an XIIvet kantved, an darnvuia avat d'ar XVvet.

Ar *Mabinogion* a zo eun dastumad kontadennoù, unnek anezo. Renka a c'heller anezo e tri rumm :

a : ar re a bled gant eun amzer gosoc'h eget hini ar roue Arzur. Danevellou *Poell*, *Branwen*, *Manauvezan* ha *Maz* a vez strollet dindan an ano *Pecar skourr ar Mabinogi*. *Huñvre Vaksen* ha *Luz ha Lewelig* a zo distag.

b : *Huñvre Ronaboe* hag *Istor Kilouc'h* hag *Olwen* a bled endeo gant Arzur, nemet ne deo c'hoaz hemañ enno nemet eun haroz kembreat.

c : En teir danevell all, *Owen*, *Gereint* ha *Peredur*, eo deut Arzur da veza an impalaer hollvrudet a gavomp en holl romantou arzurek.

Maro Lewelyn Ab Grifiz, diweza priñs dizalc'h Bro-



Gembre a skoas taol ar maro ivez gant barzoniez brezelgar Kembreiz ar Grenn-Amzer.

## II LENNEGEZ AN AMZER-VREMAN

a) BARZONIEZ. — Ober a c'heller eus Daviz Ab.Gwilym skrivagner kenta ar c'hembraeg-bremañ. Marvet eo moarvat er bloaz 1400. Eñ eo a zegasas yez ar varzoniez da veza kar tost da gomz-plaen e amzer e lec'h ma oa en e raok eun diforc'h krenn d'ober etre yez ar varzed hag hini ar skrivagnerien all.

Ijinet en deus ar barz-mañ an doare barzoneg anvet *cywydd*, ennañ ar werzennoù o vont diou-ha-diou, ar pouez-mouez en unan war ar silabenn ziweza hag en all war ar silabenn araok dibenn. An doare barzoneg-se, seiz-silabennek e werzennoù, a vano digemm e-pad daou gantved. Eñ ivez en deus diazezet da vat reolennoù ar *c'henganez*.

Awenet eo Daviz ab Gwilym hepken gant ar garantez, hag an natur. Er feur-se c'hoaz ez eo disheñvel krenn diouz ar Varzed bet en e raok.

Ar c'hembraeg implijet gantañ a zo bet kemeret da ziazez yez troidigez ar Vibl hag ar gador-brezeg, kement ma c'heller lavarout ez eo war eun dro diazez ar c'hembraeg lennegel a-vremañ.

Owen Glendwr a glaskas e 1402 ad'hounit da Gembre he frankiz. E-touesk ar varzed hen harpas e kavomp Iolo Ruz, Lewelyn Ruz, Grifiz Llwyd ha Rhys Ruz Ereri.

Ken niverus avat ez eo barzed an amzer-se m'eo aner rei amañ o anioù en eur steudad.

Er XVIvet kantved eo ret menegi anioù Tudur Aled, gwerzaouer ampart, William Llyn, unan eus barzed gwella e amzer, Edmund Prys, manet brudet e-touesk e genvroiz dre e droidigez eus ar *Salmou* e gwerzennoù dizalc'h.

b) KOMZ-PLAEN. — Sir John Prys (1502-1554) a zo oberour al levr kenta a zo bet moulet e kembraeg. Geriou derou ar skrid a zo deut da veza talbenn al levr : *Er levr-mañ*.

William Salesbury a droas an *Testamant Nevez* e kembraeg nemet e klaskas rei da yez e vro eur veurded nevez diwar wiska dezi eun doare estren. C'houita a reas avat war e daol.

William Morgan (1547-1604) eo a gasas da vat, gant sikour meur a zen all, troidigez ar Vibl penn-da-benn en eur c'hembraeg yac'h. Embannet e voe al labour e 1588.

Grifiz Roberts en deus savet eur c'hramadeg kembraek, embannet e Milano e 1567. Ar spered lemm a zen-mañ a zigoras an hent a gas da zizolei lezennoù ar c'hemmadurioù sonioù er gerioù amprestet digant al latin.

Richard Parry (1560-1623) a voe eskob St Asaph war-lerc'h William Morgan. Prienti a eure e 1620 eun advouladur reizet eus ar *Vibl*. Hag e labour eo, degaset d'ezañ eun nebeut kemmoù en doare-skriva a oad da oad, a gaver c'hoaz er *Vibl*, levr diazez pep tiegez a Gembre epad kantvedoù.

Setu ni stag gant ar seitekvet kantved. D'eur poent ma'z eo ken rouez an anioù a c'heller menegi e lennegez Breiz-Vihan e c'heller gwelout pegen founnus eo rôll skrivagnerien Bro-Gembre, daoust ma vije bet gallet staga c'hoaz reou all ouz ar steudad re hir am eus dibunet el lodenn genta eus al labour-mañ.

Daoust pegen iskis e c'hell seblantout da genta, ar seitekvet kantved a zo bet koulz arvarus ar c'hembraeg.

Eun tiegez a Gembre, an Tewdwred a zo deut e penn rouantelez Breiz-Veur e 1485. Kenta preder an aotrou nevez a zo bet heskina yez e vro c'henidik. Eur reolenn embannet e 1535 a zifenne lezel pe fiziout eur garg a-berz-stad gant nep piou bennak a rafe gant ar c'hembraeg. Kalz a uhelidi a sentas hag a baouezas d'ober stad eus ar varzed hag ampartiz ar re-mañ a zeu war ziskar e-doug ar XVI<sup>vet</sup> kantved. Pa voe roet e 1563 an urz da lakaat e kembraeg ar *Vibl* hag al *Levr Pedennou*, a voe dre c'hoant hepken da denna aesoc'h tud Bro-Gembre da gredenn ilizourien Bro-Saoz.

Hogen ne deo ket dioustu e tougo frouez labour an eskeb Morgan ha Parry. Kollet gant kembre he fram, e kouez muioc'h-mui he fobl d'eun tropellad digredenn, diseven ha techet d'ar vezventi. Pa savas ar c'hure Prichard e levr *Kantol Kembreiz* e 1648, n'oa ket eun den war gant o c'houzout lenn nemet plijet a gendalc'he ar bobl da vont gant he c'hanaouennoù hag e lakaas Prichard danvez e sarmoniou e pozioù heson war donioù anavezet. Kalz a vad en deus graet e labour savet e yez an dud vunut ha digeri a ra an hent d'an emsao relijiel a raio berz er c'hantved war-lerc'h.

Morgan Llwyd a embannas e 1653 *Levr an tri evn*, eun doare diviz etre an erer (Cromwell), ar goulm (an digenilizourien) hag ar vran (an ilizourien).

Eur saoz, deut da chom e Kembre, Thomas Gouge, eilet gant Charlez Edwards, Stephen Hughes ha reou all a stagas da groui skolioù er vro hag a savas eur gevredigez da skigna levrioù e-mesk ar beorien.

Ar varzoniez nevez a voe diazezet da vat gant Huw Morus (1622-1709) eur barz ken ampart ha ken donezonet

ha Daviz ab Gwilym. Edward Morus hag eñ a zo bet an daou varz dezo eun dalvoudegez uhel en amzer-se.

An XVIII<sup>vet</sup> kantved avat a zo bet eun amzer gaer evit lennegezh Kembre. Neuze e kavomp Elis Wynn (1671-1734). Embann a reas *Gweledigeziou ar Barz kousket* e 1703. Eun heñvelidigezh dizalc'h eo eus *Sueños* ar Spagnol Quevedo.

Edward Llwyd (1660-1709) a zo bet brasa keltiegour e amzer. E labour *Archaeologia Britannica* (henoniezh breiz-veurat) a zigor eur c'houlz nevez e lizeregouriezh Kembre.

Griffith Jones a Llanddowror (1684-1761) a zo bet krouer ar skoliou-red e Kembre. E seiz vloaz e tiazezas 37 eus ar skoliou-se, lod anezo gant daou pe dri c'heleenner. Skriva-gner e komz-plaen eo bet dreist-holl.

Theophilus Evans (1693-1767) a zo anavezet dreist-holl dre e levr *Drych y prif oesoedd* (Meleour an amzeriou koz), anezañ eun istor eus pobl Kembre, abaoe an amzeriou kosa. Kemmesket eo ennañ mojennou ha gwirionezh.

E dibenn an XVIII<sup>vet</sup> kantved, Owen Pughe (1759-1835), Owain Jones (1741-1814) Edward Williams (1746-1826) a zo bet tri embanner ar *Myvyrian archaeology*, dastumad ennañ ar pep penna eus lennegezh koz kembre.

E-touesk brasa barzed ar c'hantved e kavomp Goronwy Owen (1723-1769). Klask a reas restaol d'ar varzonezh reo-lennou striz ar varzed koz William Pantycelyn (1717-1791) a zo brasa saver kanennou sakr e vro. Thomas Edwards (1739-1810) a zo brudet dreist-holl dre e beziou-c'hoari.

En naontekvet kantved e teu lennegezh Kembre da veza muioc'h lies-doare c'hoaz eget en tremened. Bez' he deus skridvarnourien evel Lewis Edwards, arboellourien evel Samuel Roberts, romantourien evel Daniel Owen, istorourien evel Owen M. Edwards, barzed evel Anna Griffiths, Ebenezer Thomas, John Blackwell, Ceiriog, Islwyn hag all.

M'he deus graet tachenn al lennegezh nemet mont war ledanaat en hon amzer dre ma tieub speredou ar skriva-gnerien diouz bed striz ar prederiou hag an tabutoù relijiel hepnuiken. Mar rank stourm ar c'hembraeg evit e vuhez evel yezou an holl boblou bihan, spi a c'hell kaout en dazont dre ma oar Kembreiz da nebeuta lenn ar yez a gomzont. Salv ma c'hellfemp ni lavarout kemend-all.

F. E.

*Levrlennadur.* — Rev. J. C. Morrice, *A Manual of Welsh Literature* (500-1800) Jarvis and Foster, Bangor, 1909. — Parch. D. Ambrose Jones, *Llenyddiaeth a llenoriou Cymreig y Cedwaredd Ganrif ar Cymtheg*, Lerpwl.

## IWERZON 1921-1929 :

### Ar politikerezh hag an emgann evit ar yez

Emgann pennek an Iwerzoniz a-enep d'ar Saozon en deus diskouezet d'ar bed perziou mat eur ouenn, divuzul he galloudeziou eneberezh evit derc'hel ouz ar gwaskadur. An Iwerzoniz o deus gounezet o frankiz i o-unan, hag a-enep eun enebour kreñv ha pilpous.

Emsavadenn Bask a voe derou amzeriou nevez evit Iwerzon. Ar brezel a-enep Bro-Saoz a zlee padout pemp bloaz (1916-1921). E votadeg 1918, strollad « Sinn-Fein » a voe trec'h, gant 73 gador war 105. Kannaded ar strollad-se ne felljont ket d'ezo chom e Wesminter hag en em strolljont evit sevel an « Dail-Eireann » (Lez-varn-veur Iwerzon) gant de Valera evel rener. E miz Genver 1922, an « Dail-Eireann » a sinas gant Bro-Saoz eun emgleo evit distaga da vat an « Ulster » diouz Iwerzon. Neuze en em zistrannas ar « Sinn-Fein » e diou lodenn : unan a-du gant Griffith, hag eben gant de Valera. An hini diweza a nac'has anzav an emgleo, a nac'has toui lealded e-keñver kurun Vro-Saoz, hag a yeas kuit eus al Lez-Varn-Veur. Nebeut goude, e Mezeven 1922 e tarzas ar brezel etre strolladoù Iwerzon : ar Republikaned, blienet gant De Valera a-enep gouarnamant Griffith. Goude emgannou taer a-walc'h, e Mae 1923, dre urz De Valera, ar Republikaned, trec'het, a ehanas da stourm. Etre 1923 ha 1927, an « Dail-Eireann » a labouras hep ar Republikaned bepred a-enep d'ezi. Lezennoù war ar mererezh, an arc'hant-stad, ar gelennadurezh a voe graet evelkent. E Mezeven 1927 e voe ar Republikaned dibabet niverusoc'h er votadeg, ha nebeut goude, plega a rejont da doui lealded e-keñver kurun Vro-Saoz. Bez e voe neuze en « Dail-Eireann » kannaded evit pep strollad politikel : ar c'hammed kenta a oa graet evit eur vuhez politikel ha broadel reiz.

A-boan ma oa bet anzavet Iwerzon evel Stad, ma kroge an « Dail-Eireann » gant an emgann evit ar yez. Eur brezegenn a voe graet evit diazeza roll-labour broadel ar gelennadurezh. E miz Ebrel 1922 e krogas ar roll-labour-se

da veza heuliet. Ar saozneg a zlee beza kaset er-maez, hag e voe lakaet spi bervus an holl Iwerzoniz er rummadou skolidi bihan hag a vefe desket e gouezeleg nemetken. D'an derou e voe diaes-tre, rak evel e politikerezh, an dud a vicher ne oant ket niverus. Nebut a gelennerien a oa gouest da zeski ar yez vroadel d'an diskibien. Skol a voe graet e-pad an ehan-labour d'ar gelennerien evit d'ezo dont da veza barrek war an dachenn-se. Skoliou-kreiz, skoliou-meur a voe krouet, ma oa roet enno an deskadurezh en iwerzoneg penn-da-benn. C'hoant o doa an Iwerzoniz da gaout eur gêr na vefe komzet enni nemet gouezeleg. Ar gouezeleg a oa c'hoaz implijet e Galway : kaset e voe di eur bagad soudarded a oa ar gouezeleg d'ezo yez o c'havell, evit ober bruderez evit ar yez. Ouspenn da se, e voe graet e Skol-Veur Galway kenteliou war pep tra e gouezeleg. Tud ar c'hêriou ha ne-ouient ket o-unan ar yez vroadel, a gemeras mevelien o komz gouezeleg, evit gallout sevel o bugale er yez-se. D'ar c'houlz-se, ar gouarnamant a lakaas da embann pep tra kaset d'ezañ e gouezeleg, gant ma ne vije ket re fall ar pennad-skrid. Evit beza kargad, mezeg, breutaer, ret oa anavezout an iwerzoneg. Yez ar mererezh, yez ar politikezh, yez ar gelennadurezh, ne oa ket koulskoude yez ar c'henwerzh bras : evit se, e tlee an Iwerzoniz ober gant ar saozneg. E pep doare, war pep tachenn ar vuhez, e stourmas an Iwerzoniz evit adkavout o ene gwirion en eur zeski ar yez vroadel. Kemma yez eur vroadelezh a-bez, setu al labour ramzel o doa sammet renerien Iwerzon, hag a gasont da benn, rak gouzout a ouzont ervat, evel ma lavare Thomas Davis er c'hantved diweza : « Eur vro hep he yez n'eo nemet eun hanter vroadelezh ».

P. AR BIHAN.



## An arz iwerzonek

Klask lakaat en eur pennad berr istor an arz en Iwerzon setu eun dra diaes awal'h ken pinvidik hag ec'hon ma'z eo an danvez.

En Iwerzon e ranner istor an arz e teir lodenn : eus an amzeriou kosa betek donedigezh ar gristeniezh evit an hini kenta, eus derou ar gristeniezh betek aloubidigezh Iwerzon gant ar Saozon evit an eil, hag adalek penn kenta an naontekvet kanved evit an hini diweza.

Ret eo hel lavarout en Iwerzon evel e broioù all Europa an arzourien kenta a oa anezo micherourien a glaske lakaat kaerder war an traou a servije d'ezo bemdeiz : armou, dilhadou, arrebeuri hag evel ma oant ampart graet o deus abred penn-oberennou.

Ar poblou o deus bevet war zouar Iwerzon o deus lezet war o lerc'h traou a ziskouez pegen desket e oant war labour ar metalou. Implijet e veze ganto da genta an arem ha da c'houde an aour, an arc'hant hag ar staen (e Kerne-Veur eo e kaved ar staen ; ar vro se a voe darempredet gant meur a bobl evit he finvidigezh). Gwelout a raer c'hoaz er mirdiou iwerzonek troioù gouzoug, troioù brec'h, armou a bep seurt, henvel an tresadennoù a zo warno ouz ar re a gaver skeudennet war ar mein hir pe an taolioù-maen ; henvel awal'h int ivez ouz ar re a zo war dilhad ar vigou-denned.

Wardro ar 4<sup>vet</sup> kanved setu ma teu ar feiz kristen d'entana speredou an Iwerzoniz hag e sioulder ar manatiou, emañ ar venec'h oc'h adskriva an danevellou koz, pedennou pe istoriou ar sent ; awenet gant kaerder ar skridou setu ar re-mañ o skeudenni war riblenn ar pajennoù pe endro d'ar penn-lizerennoù eur bed a hunvre, eur bed iskis ha divoutin ; er gweadurioù emañ al laboused ar pesked, al loened oc'h en em zistumma oc'h en em astenn etouez ar bleunioù hag ar stered ; ret eo sellout ouz al levrioù se evel da skouer hini Kells evit meiza pegen kreñv ez eo bet levezon enliverien Iwerzon er grenn-amzer. Ha setu an orferbourien o kemer skouer war al levrioù se, o sevel d'o zro teñzorioù : kalirioù, kroazioù, irc'hier relegou ; e gwir oadvez aour an arz iwerzon eo bet an amzer se. Levrioù a vefe ret skriva evit menegi holl penn-oberou an arz kristen

hepken. Allaz ! re binvidik ar vro ha re eurus ivez rak setu ar Saozon o tilestra a bep tu, o tistruja ar manatiou, o tevi an ilizou, hag evel n'hell arz ebet bleunia en naonegezh hag en dienez eun noz hir a gouez ; met skoazellet gant ar varzed ar bobl a stourm gant spi evit ma baro adarre, deiz pe zeiz, war an enezenn c'hlas heol ar frankiz.

Epad seiz kantved e pado an emgann. Hogen setu an naontekved kantved o tont ; dre studi ar yez hag an danevellou koz emañ ar vro o tihuni, a bep tu arzourien o sevel ; setu o anoiou — livourien, skulterien, skeudennourien — : Sean Keating, Klarke, Paol Henry, O'Rourke Dickey, J. B. Yeats, Estella Salomon, Leo Whelan, Maeris Mac Gonigal, Mikael Mac Liammon, ha meur a hini all c'hoaz ; war bep tachenn e weler Iwerzoniz o vruda o bro.

Greomp evel hor breudeur tramor, miromp fiziañs en amzer da zont hor C'heltia.

RONAN C'HOUEYOU.



## AN HARLUAD

Edo o tiskenn war-du ar stêr.

A-hed ar veaj e oa chomet sioul, azezet mat e-kichen ar werenn, o sellout ouz moged e gorn, bamet evel eur bugel pa wele kelc'hiou ennañ, o troidella hag o pignat, hag o vont da get, skañv ha skoemp.

Lenn n'halle ket.

Dont a rae soñj d'ezañ bremañ eus an daou grouadur a oa azezet dirazañ. Paotrig ha plac'hig. Daoulagad glas, a bare warnañ sklaer ha glan, poullou-mor er reier e-kreiz an hañv.

Souezus pegen dedennet e oa bet a-viskoaz gant ar poullou-mor. E-pad an ehanou-skol, pa ne oa c'hoaz nemet eur bugel, e teue alies war an aod hag e chome gourvezet war ar roc'h e-tal eur poull. Pep tra a oa eur c'hevren evitañ : ar bezin glas treuzwelus, ar bezin ruz blevek, a zo ken divalo eur wech tennet er-maez eus an dour, ar c'histin-mor hag ar pesked bihan, ar bruzunou-kregin skedus war an traez aour.

Eurvezioù a-bez e chome eno, boemet ankounac'haet gantañ pep tra, beuzet ha mezevellet gant an daou strad, an hini a c'helle tapout gant e zorn hag an hini glas lusk-dilusk doun evel strad eun islonk hag a oa heñvel-mik ouz an oabl.

Poan en deveze bep gwech o vont kuit, poan o terri al liamm kevrinus ha nerzus e stage ouz an dour.

An dud er vro-mañ ne ouzont ket peseurt perz-hud a zo gant o daoulagad.

Ha mat en doa graet dont ? Eun tammig nec'het e vezer atao o tont da welout tud ha n'hoc'h eus ket gwelet pell 'zo. Seul vuioe'h e tostae, seul nebeutoc'h a vall ' oa warnañ o tegouezout.

Azeza a rafe ouz taol hag e vije kinniget d'ezañ bara ha kig-sall gant eur banne kafe tomm ha dienn fresk. Gwelout a rae e vamm o vont hag o tont dirak an oaled, o stoui bep ar mare da lakaat keuneud en tan.

Hag eun tammig diwezatoc'h e klevfe trouz pounner boutou an tad, hag a azezfe eveltañ ouz an daol. « Deut oc'h ? »

Hag en eun taol e splannas dirazañ an draonienn.

Ha leun e spered hag e galon gant kaerder e vro morse

n'en doa huñvreet taolenn ken kaer, ken fromus. Ya, kaeroc'h e oa c'hoaz evit ma soñje d'ezañ. Dour ar stêr a oa ken sioul, ken splann, ken skedus ha gorre eur melezeour. Ar gwez, a bep tu, o doa kemeret o gwiskamant diskar-amzer hag a daole en dour hag en oabl o aour ruz hag o c'houevr melen.

Pebez sioulded ! Pebez didrouz !

Chom amañ ; ha sevel eun ti. Beva. Beva e kened hag e meurded ar Bed. Dieub ! Ezomm ebet eus an dud, diboell ha kriz.

Azeza a reas war ar c'hleuz, war vord an hent-alez hag e sellas.

Hag e verzas eur wech c'hoaz pegen stag 'oa e galon ouz ar vro-se, e vro.

Pelloc'h ez eas. Trouz al lamm-dour a gleve bremañ, kreñvoc'h-kreñva dre ma 'z ae. Bremaik e vije ret d'ezañ tremen dirak daoulagad souezet maouez an ti-skluz.

« Deut oc'h 'ta ? »

« Deut oun. »

Edo an heol o vont da guz p'en em gavas er gêr.

Laouen e voed ouz e welout. Ha goude koan, a-raok mont da c'hourvez war ar c'holc'hed pell, e chomjod da gonta doare tud ar vro. An hen-mañ-hen a oa aet da labourat er broiou-kreñc'h. Kelou a gase d'e dud eur wech ar mare. Ar plac'h-mañ 'oa dimezet ; kaer 'oa bet an eured. He zad siouaz a oa war e dremenvan ; an Aotrou Person a oa deut dija.

Deveziou sioul a dremenas, deveziou didrabas ha diskui-zus. Mat e veze graet war e dro. Levenez 'oa en e galon.

Ha neuze, eun deiz, evel eur strakadenn gurun war ar menezioù e-kreiz an hañv, e tarzas ar reuz. Dic'hortoz, kriz, mantrus.

Da betra 'oa bet mat ? Lavarit din.

Pa soñjer ! Labourat a-hed e vuhez da sevel bugale e-giz-se. Lopa e gorf, arboelli gwenneg goude gwenneg ha dispign e holl arc'hant evit kas anezo d'ar skol. Ha gwelout anezo o nac'h o deskadurez hag o tizenori an tiegez ! Mez e tlefec'h kaout.

En toull ! Va Doue, biskoaz n'hor boa huñvreet an dra-se !

E-lec'h kaout eur vuhez reiz evel ar re all.

Dizenor e dad hag e vamm. Didalvez !

Gant ar vez !

C'hoant bras a savas ennañ da zrailha pep tra en ti, da fflastra, da vruzuna, da skei. Da skei ! Gwaska a reas kalet war e imor. Hag ez eas kuit, trumm, taer, faeus.

Mevelien ! setu petra 'oant. Chas ! ne oant nemet chas, ne oant bet morse nemet chas a-hed o buhez, laouenoc'h

gant an tabliou baz eget gant an tammou askorn a veze roet d'ezo.

Tud digalon, pa oant bet atao o krena hag o plega. Trei-tourien, nac'het ganto deskadurez o zadou. Heñ avat ne blegfe biken !

Eur mor a fae hag a gasoni a save ennañ dre ma'z ae. Birvi a rae evel pa vije bet e-kreiz an emgann, taer ha spontus. Eur vaouez a dremenas e-biou d'ezañ hag a sellas outañ. Strafuilh a welas en he daoulagad.

Eun tammig pelloc'h evelato e kroummas e gein ; eur gridienn iskis a dreuzas e vruched hag e gof hag ez en em santas faez ha gwan.

Ne badas ket.

Sounn ha start eo e treuzas an draonienn gaer ha didrouz. Ha kalon a zeuas d'ezañ adarre. Gant eur feiz divent. Ken na darze.

T. KERUZORE

## ER GLOED EUR

Ur gloed eur e anañan, nendi ket pell ahann  
Ur gloed eur ar ribl er hoed, er hoed béù o deil splann  
E glén en aehen denér, ' stoé o brig ar en deùr  
Du-sé, nésik eù ahann, én tu-rall d'er gloed eur.

Rosenneù-loh e zigor pen daùl en heol é vann  
Pe goéh en nos em brennant ha ne van ér loér-gann  
Nameit dameuh, én deùr glein kridiennet d'en aùel  
Dameuh er gloed aleùret, deùr glas, skéd argantél.

Devat er gloéd aleùret mar a huéhad éh an  
De huélet, hoévar pé blah, tenér ha melégan  
Ardrañ er gloéd aleùret en hani- ' van du-sé.  
Uit dibrennein er gloed eur, émen ' ma en alhué ?

A. J. R.

## NEWYDDION O LYDAW

Cyhoeddodd Ker-Vreiz, cymdeithas lenorol a cherddorol y Llydawyr deoledig ym Mharis lythyr gosteg i ofyn dysgiad yr iaith Lydewig yn ysgoliau Llydaw. Ers yr oes ysgoliau Ffrengig yn ein gwlad y byddwn yn taflu ein « diasfad uwch Annwfn » — heb lwyddo.

Bu y llythyr hwn wedi ei ysgrifennu gan Lydawyr o bob feddwl, yn enwedig offeiriaid a chymunaid.



Y Tad Loeiz ar Floc'h, periglor yn 2, rue du Parc, St-Brieg (St-Brieuc C.-du-N.) sydd wedi adgymeryd cyhoeddiad ei gylchgrawn duwiniaethol, gan yr enw newydd : « Kaierou Kristen » (Llyfrynau Cristionog) Ni goddefir ei gylchgyhoeddiad gan y Swyddau Ffrengig. Fe cyhoeddir ef fel llyfr.



Yr *un* cylchgrawn llenorol Llywedig ydyw « Tir na n-Og. » Misol (Hanner-corun y blwyddyn). Golygydd Paul Le Gourrierec, Cité des Etudiants, Boulevard Sévigné Rennes-Bretagne. (C. C. Rennes 622-50).



Y newyddiadur cenedlaethol cyntaf wedi ei brintu ers mis Gorffennaf 1944 ydyw « An Avel » (Y Gwynt).

Tanysgrifiad 3/3 am chwech mis. Mr. Ollivier, 49, rue St-Melaine — Rennes - Bretagne.

---

Le Gérant : Le Bihan Pierre

I. C. A., 17, rue Jean-Jaurès, Brest  
Dépôt légal 2<sup>e</sup> trimestre 1946

